

Sôn al Laouenanik *es*

es Sôn da Luskât



I

En deiz all o pourmen oan bet,
Eul laouenanik 'moa paket.'

DISKAN

Tralilali, tralilali
Tralilali, tralila.

2

Pa oa paket, paket e oa
Ha laket er c'hraou da larda

3

Pa oa lardet, lardet e oa,
Klasket ar c'higer d'he laza.

4

Ar c'higer braz hag he vevel
A deuz gantho peb a vouc'hel

5

Al laouenanik oue strobet
Hag he zaou lagadik mouchet

6

Laket var an daol da laza,
Ha klasket kerdign d'he staga.

7

Pa oue lazet, ha displuet
E oue diouztu diskroc'hennet

8

Hag he blû a oue destumet,
Kaset da boueza d'an Naoned,

9

Pa ouent pouezet, pouezet e oant
Hag e poezent daou lur ha kant!

10

Kouskit aze, toutouik-me
Ha bezit fur en ho kuele

